

**Magerez an drezne (1)**

Na me me mouez a talent speret da gompozi,  
 Mouez evid e hana er giz ma fote din.  
 me a raffe eur c'himiad, ia na ven ked pel  
 var sujet ar vagerez iaouank deus a gastel.

Me zo bed ouec'h mis varnugent en Kastel magerez  
 en ti ar c'homt ar drezne ag ive ar c'homtess  
 ag a meus maget dezan diou zimezel iaouank  
 ag e tond d'or dilezel me meveus nehamant.

Me a meus pourmenet gato dre ar saliou ag ar c'hambjou  
 a dre paviou kastel pa veze assembliou  
 me zo bed cato(2) ive en alle ar Kernevez  
 hag er maner k/laodi demeurañ var ar meaz

Me zo bed gato ive nag er bordic ar mor  
 Sellet doc'h ar vardaïdi vonet gant ar kanol  
 Sellet doc'h ar verdaïdi e vond da vizina  
 Da kichen chapel Callot eur plaç an devota.

Deus va zi pa sortian me a vel touriou castel  
 hag a digas din da chonch deus va diou dimezel  
 kalon mam a zo tener en endret he bugel  
 ag hini ar vagerez e kichen ar c'havel.

F. Boulc'h, 21 sept. 1852.

(1) *Peut-être faut-il lire drezen (par erreur), au lieu de drezne.*

(2) *Ms. : cato ; lire : gato.*